

An de kentan euz a viz Even

Sant Ronan a zo deut en ho bro euz a Dre-Mor evel Sant Briek, Sant Tual hag an darnvuian euz zent ar Vro.

Da gentan, e renaz eur vuhe kuzet ha dizanve 'barz eur peniti, en-kreiz eur c'hoat euz Kerne, ken n'an nije pareet, dre vuzud, eun niver braz a glanvourien : neuze e teuz da vean brudet-braz.

Tamallet e-gaou gant eur c'hroeg fall, hanvet Keban, e oe barnet gant ar roue Gradlon da vean debret en-beo gant chas pe bleidi kounnaret. En eur ober sin ar groaz, e lakeaz anhe da dec'hel, o rei da anout, war eun dro, he zantelez ha nerz burzuduz euz sin ar groaz.

Ar roue Gradlon, o welet ar burzud, e oe goneet he galon hag ar Zant, lezet da vonet kuit, a varvaz eun nebeut goude, brudet hag enoret dre bewar c'horn ar Vro.

Bep seizved bla e ve gret d'ehan eur pardon dispar hanvet tromeni, da laret eo tro ar Minihi, dre ma reer tro ar minihi pe vanati e lec'h 'neuz bevet ar manac'h santel ha lec'h 'neuz graet kement a vuzudo.

Pedenn da Zant Ronan

Ton : *D'hon mamm Santez Anna.*

Diskan. Sant Ronan, hon faeron,
Ni ho ped a galon,
Miret, en han 'Doue,
Hon c'horf hag hon ine !

Kaer eo, diouz ar beure,
Ar gliz er parkeier :
Kaer ho pennoz ive
War-n-omp en pep amzer.

An den pinvik, ar paour
Aman 'zo daoulinet :
E-lec'h danvez hag aour,
D'he reit evurusded !

Reit ive 'vel gwech-all,
Iec'hed d'ar glanvourien !
Deut bepred d'hon diwall
Diouz ar vrec'h, ar vosen !

Bleidi 'zo bet gwelet
Tro war dro d'ho lochenn :
Bleidi 'zo kounnaret
Ouzomp, ouz hon c'hredenn.

Ann anevaled goue
Pell diouz-hoc'h a dec'he,
Hag ar bed didrue
Trec'h 've d'ho pugale ?

Nan ! nan ! rag ho kalon
Morse n'eo bet sklaset,
Nan, galloud hon faeron
Morse ne vo berreet.

Evit gloar hoc'h hano
Diredet d'hon sikour !
Kaset pell diouz hon bro
Kaset an enebour !

C'hoant hon deuz da vevan
En skeud ho tiwaskell :
Chom hep ho servichan,
Kentoc'h mil gwech mervel !

Holl en-pad hon bue,
Ni ho pedo laouen,
En gortoz mont d'an Ne
D'ho meuli da viken.